

# Bilañs bloavezh 2024

## Bilan de l'année 2024



Ar Redadeg

## Pennad Stur / Edito

Klozet ar Redadeg 2024, ur wech ouzhpenn hon eus kaset da benn an difi da lakaat ar vazh-test d'ober tro Breizh, kaset a dorn da zorn war 2222 Km. An disoc'h a zo kentoc'h pozivitel p'eo bet prenet muioc'h a gilometroù eget biskoazh. Aet eo kalz war-raok perzh ar strollegezhioù lec'hel, an hiniennoù pe c'hoazh ar c'hevredigezhioù. Gouest omp bet neuze da harpañ Diwan hag ar raktresoù 'giz oa bet soñjet.

E 2026 e vo an 10<sup>vet</sup> Redadeg, un digarez brav evit degas nevezentioù d'hon aozadur ha souezhadennoù moarvat....

La Redadeg 2024 s'est achevée, une fois de plus nous avons accompli le défi de porter le témoin sur les routes des 5 départements bretons, de main en main, nuit et jour sur 2222 Kilomètres. Le bilan de cette édition est positif, jamais encore autant de kilomètres n'avaient trouvé preneur. La participation des collectivités territoriales est en nette hausse tout comme celle des contributeurs privés et des associations. Ainsi nous sommes en mesure de venir en aide à Diwan et aux projets sélectionnés comme nous l'avions envisagé.

2026 sera l'année de la dixième Redadeg, une belle occasion pour repenser notre organisation et pour apporter des surprises assurément....

### Palioù 2024 / Objectifs 2024

- Gwerzhañ muioc'h a gilometroù
- Brasaat hon dastum arc'hant emren
- Klask mesened ha kevelerien nevez
- Kaout div fest vrav evit al loc'hañ hag an degouezh
- *Vendre plus de km*
- *Augmenter notre autonomie financière*
- *Chercher de nouveaux partenaires*
- *Réussir les deux événements du départ et de l'arrivée*

**Mersi bras d'an holl, rederien,  
prenerien, mesened, harperien,  
arzourien, skipailhoù lec'hel....**

**Emgav e 2026 evit redek gant  
plijadur.... betek an trec'h !**

*Un grand merci à tous; coureurs,  
acheteurs, mécènes, soutiens, artistes,  
équipes locales...*

*RDV en 2026*

*avec toujours autant de plijadur*

### Kehentiñ / Communication

- 17 atersadenn radio etre 2023 ha 2024
- 1 jingle + 1 atersadenn bet kaset da 20 radio (dre BOA)
- 13 kemenadenn gelaouiñ etre 2023 ha 2024
- 150 pennad kazetenn a hed ar bloaz
- 1 abadenn Tebeo (a-raok ar Redadeg)
- abadennoù TV FR3 e-pad ar Redadeg
  - Gwener noz al loc'hañ : 100k seller
  - Sadorn kreisteiz kentañ : 62k
  - Lun-Gwener : 12/13 = 128k ; 19/20 = 229k
  - Sadorn noz an degouezh = 288k
- 1 Filmig skignet e salioù sinema, tiez-kêr hag er Roazhon Park
  - 17 interview sur l'année 2023-2024
  - 1 jingle et une interview diffusée sur 20 radio via BOA
  - 13 communiqués de presse sur l'année
  - 150 articles de presse en PQR
  - 1 passage Tebeo
  - des passages quotidiens sur France3 pendant la course
    - vendredi du départ : 62 k téléspectateurs
    - samedi midi : 62k
    - lundi-vendredi sur le 12/13h : 128k, sur le 19/20 : 229k
    - samedi soir à l'arrivée : 288k
  - 1 petit film à disposition des salles de cinéma, des collectivités, de Roazhon Park

### Loc'hañ ha degouezh / Départ et arrivée

#### 17/05 : Beg ar Raz

Ur rakloc'hañ arouezel eus Enez Sun d'ar Yaou hag ul loc'hañ gwir aozet gant ur skipailh mennet, leurennet brav gant fent en ul lec'h istorel ha naturel fromus. Tud e-leizh, an holl zilennidi amañ, brezhoneg, heol ha glav, youl, dañs ha levenez. Un dro vat !

#### 25/05 : Montroulez

Kilometroù diwezhañ : 2 garr-samm e straedoù kêr Montroulez, dibunadeg vrav ha diskenn a-hed ur gordenn eus dourbont Montroulez dirak kalz tud. Kemennadenn ha prezegenn skignet war-eeun gant Radio Arvorig Fm hag ar rouedadoù sokial. **Da lenn ha da selaou amañ.**

Hag ur gouel dreist-ordinal diouzh noz e porzh ar Manu hag er Sew. En tu all da 5000 den a zo bet en holl !

#### 17/05 : Pointe du Raz

*Un pré-départ symbolique depuis l'île de Sein le jeudi avant un départ porté par des équipes locales très mobilisées, belle mise en scène dans un cadre naturel somptueux. Soleil et pluie, joie, musique, danse, breton sur scène... un très beau départ avec la présence de tous les élus locaux.*



#### 25/05 : Morlaix

*Arrivée dans les rues du cœur de ville de Morlaix, déambulation émouvante et descente en rappel de l'aqueduc de la ville, devant un public venu en nombre et enthousiaste. Sur scène le message officiel dévoilé et le discours de fin, relayé en direct sur Arvorig Fm et sur les réseaux sociaux. [A lire et à écouter ici.](#)*

Et une fête mémorable le soir dans la cour de la Manu et au Sew.. Plus de 5000 participants lors de cette arrivée !

## Gwerzh kilometrou / Vente des kilomètres

	2024				2022			
	Km		Gounid		Km		Gounid	
Tud - particuliers	1062	50 %	127 647 €	36 %	956	47 %	99 048 €	37 %
Kevredigezhioù - Assos	582	28 %	87 175 €	24 %	638	31 %	55 454 €	22 %
Embregerezhioù Entreprises	139	7 %	45 030 €	13 %	131	6 %	33 950 €	9 %
Strollegezhioù lec'hel collectivités territoriales	306	15 %	95 905 €	27 %	307	15 %	87 535 €	32 %
<b>Hollad - Total</b>	<b>2089</b>		<b>355 757 €</b>		<b>2032</b>		<b>275 987 €</b>	



## Ul labour a-stroll / Un travail d'équipe

muioc'h eget **11 300 eur** priziet  
plus de **11 300h h** de bénévolat **147 890€**

## Mesenerzh / Mécénat

Kazi tizhet eo bet ar pal a 30 000€ a drugarez d'hor mesened feal ha da reoù nevez a zo deuet dreist-holl dre rouedad "Produet e Breizh". Ret eo ouzhpennañ an 12 000€ a skoazell danvezel gant an embregerezhioù.


### Trugarez vras d'an holl !

L'objectif de 30 000€ est quasi atteint grâce à nos fidèles mécènes et à de nouveaux partenaires venus essentiellement via le réseau "Produit en Bretagne".

Il ne faut pas oublier les 12 000€ d'aide matérielle par les entreprises.

**Merci à tous !**

## Mesenerzh Arc'hant / Mécénat Financier



## Gwerzh dafar / Merchandising

1887 T-shirt, 234 chupenn / vestes,  
136 re loeroù / paires de  
chaussettes, 110 boned &  
kasketenn ....

**Gounid : 20 120 €**

## Disoc'h / Résultat

Produioù / Produits : 449 500 €

Dispignoù / Dépenses : 23 590 €

Disoc'h / Résultat : + 213 300 €

Diwan &

raktresoù/projets : 145 000 €

Pourvezhioù-

provisions 2025 : 66 000 €

## Raktresoù skoazellet / Projets soutenus

- 33 raktres resevet
- 9 raktres dibabet gant Kuzul ar Re Fur
- Diwan
- 33 projets reçus
- 9 projets choisis par le Conseil des Sages
- Diwan

**Evit 145 000 € skoazell**

**Pour 145 000 € redistribués**

**Abaoe / Depuis 2008  
> 1 milion € !**

	KM gwerzhet	Arc'hant Km* (K €)	Roet (K €)
2008	600 Km	50	61
2010	1200 Km	108	84
2012	1500 Km	141	121
2014	1500 Km	137	125
2016	1700 km	173	124
2018	1800 Km	170	134
2020-21	2020 Km	189	130
2022	2022 Km	184	155
2024	2089 Km	246	145
		<b>1398</b>	<b>1079</b>

\* hep strollegezhioù lec'hel ha mesened

### Dazont / Avenir : Redadeg 2026

## Kuzul-Merañ ha Burev Nevez / Nouveau CA et Bureau

### Burev / Bureau

Prezidantelezh a-stroll - Présidence collégiale : Azenor Kallag, Jean Brichet, Maina an Taleg  
Tenzorerezh - Trésorerie : Maina an Taleg, Katelin al Lann (eil)

### Izili ar C'huzul-Merañ / Membres du CA :

Veig Baron, Maze Bergot, Mailys Boitel, Fabris Cadou, Jerald ar Gov, Katell Grall, Bernez Kere, Joel Le Baron, Christian Le Normand, Ilan Le Roux, Erell Lhopiteau, Hoel Mevel, Tangi Poisson, Solena Raynaudon-Kerzhero, Jean-Michel Sanner, Loeiz Urvoy



Emvod-Meur 2024 e Pontev / AG 2024 à Pontivy

## Paliou / Objectifs 2026

- Klokaat ha stabilaat ar skipailh gopridi
- Mont war raok war ar c'hevelerezh
- Gwerzhañ 2222 km (pe muioc'h !)
- **Dont da vezañ anavezet gant an holl Vreizhiz !**
- **Gouelioù loc'hañ ha degouezh bravoc'h c'hoazh !**
- **Lidañ a-zoare an 10<sup>vet</sup> Redadeg !**
  - Compléter et stabiliser l'équipe salariée
  - Développer les partenariats
  - Vendre 2222 km (ou plus !)
  - Être connus de toutes les Bretonnes et les Bretons
  - Des fêtes de départ et d'arrivée encore plus belles !
  - Fêter comme il se doit la 10<sup>ème</sup> Redadeg !

## Redadeg 2026 : Eus Lannuon betek Naoned, eus an 8 d'ar 16 a viz Mae

Ur bodad labour a-youl vat oa bet savet evit reiñ lañs d'ar galv, kejañ ouzh ar re o doa lakaet o anv e miz Du gant ar pal gouzout hiroc'h diwar-benn pep raktres. Diouzh muzulioù a bep seurt, eo bet graet ar choaz hervez ur votadeg ha laouen eo Kuzul-merañ nevez ar Redadeg hag e vodad labour o kemenn deoc'h e vo degemeret loc'hañ 2026 e Lannuon d'an 8 a viz Mae hag an degouezh eizhteiz war-lerc'h e Naoned d'ar 16 a viz Mae.

Un groupe de travail avait été constitué pour lancer l'appel et rencontrer, lors d'entretiens en novembre, ceux qui avaient candidaté afin d'en savoir plus sur leur projet. Basé sur différents critères, le choix s'est fait selon un vote. Le nouveau Conseil d'Administration et son groupe de travail sont ravis d'annoncer que le départ 2026 aura lieu **le 8 mai à Lannion** et l'arrivée 8 jours plus tard **le 16 mai à Nantes**.

